



STUMMADUR WAR AR C'HOARIVA-DESKADUREL

KINNIGET DINDAN 3 DEVEZH

03/09, 18/10 HA 20/12 /2021

LEC'H DA VEZAÑ RESISAET

GANT : YANN-EDERN JOURDAN

Bet stummet war ar c'hoariva-deskadurel gant Bernard Grosjean (skol-veur ar Sorbonne Nevez - Pariz 3), engouestlet evit ar c'hoariva e brezhoneg abaoe 16 vloaz evel komedian ha leurenner (Strollad Mat ar Jeu, Strollad Ar Vro Bagan...), kenbrezidant Kengevredigezh C'Hoariva, kelenner e skol-veur Brest (o kas kentelioù war ar brezhoneg dre ar c'hoariva), aktour evit ar sinema hag an advouezhiañ e brezhoneg (Kalanna Prod, Tita Prod., Monochrome Prod., Dizale,...) e kinnigan ar rakstummadur-mañ deoc'h.

TITOUROÙ ENSKRIVADURIOÙ

DAO :

Pgz : 02 98 99 94 24

Postel : degemer@dao.bzh

P A L

Ar pal anezhañ n'eo ket stummañ ac'hanoc'h war ar c'hoariva-deskadurel, anat deoc'h, met treuzkas ostilhoù simpl hag efedus deoc'h evit ma implijfec'h ar c'hoariva (diouzh ho c'hoant pe diouzh an ezhomm) evel benveg pedagogel e-kerzh ho kentelioù : strollañ ar stajidi da skouer, lakaat anezho da labourat war ar brezhoneg, broudañ anezho da ezteurel e brezhoneg, da vevañ ar yezh a-gorf, da lakaat an ijin da vont en-dro, da grouiñ... Diazezet e vezo ul lodenn eus ar rakstummadur war skiant-prenet pep hini ac'hanoc'h rak pouezus-kenañ eo din gouzout eus ho ezhommoù ma 'vefe eus outo evit resisaat ar c'hinnig e-doug an tri devezh-labour. P'eo an hegarated unan eus ar perzhioù-diogelañ ret da gaout ha da dreuzkas evit kas ur seurt labour e roin un tañva deoc'h eus hentenn ar « Feedback arzel » bet savet gant Vincent Adelus (bet stummer din). Gant ma 'vezo plijadur !

PROGRAMM AR STUMMADUR

Devezh 1

Ar c'hoariva

- Ober anaoudegezh an eil re gant ar re-all
- Kelc'h penn-kentañ an devezh (En em ginnig)
- Petra eo ar c'hoariva ?
- Perak ober c'hoariva e-kerzh ur stummadur ?
- Geriaoueg ar c'hoariva
- Eus petra 'z eus ezhomm evit ober c'hoariva ?

Ar stal c'hoariva

- Petra eo ur stal c'hoariva ?
- Peseurt palioù 'zo d'ur stal c'hoariva ?
- Peseurt testenn implijout ?
- Ar stern ha Reolennoù ur stal c'hoariva
- Ar « Feedback arzel »
- Kelc'h fin an devezh

Devezh 2

- Kelc'h penn-kentañ an devezh
- Labourat war an destenn ha diazezoù ar c'hoari
- Kelc'h fin an devezh

Devezh 3

- Kelc'h penn-kentañ an devezh
- Labourat war an destenn ha diazezoù ar c'hoari (diouzh al labour bet kaset e-kerzh an eil devezh)
- Lakaat e pleustr
- Kelc'h fin an devezh



c'hoariva
www.teatr-brezhonek.org